



Skoazell 2010

Yalc'had
evit an danvez
kelennerien
divyezhek
galleg-brezhoneg



Ar yalc'had « Skoazell » zo ur skoazell hiniennel evit an dud a brient ar masterioù deskadurezh divyezhek galleg-brezhoneg. Lakaet e vez e pleustr e framm ar skoazelloù stummañ hiniennel hag an oberoù evit politikerezh yezh ar C'huzul-rannvro da gas ar brezhoneg war-raok.

PESEURT PALIOÙ ?

Stummañ un niver bras a dud varrek da gelenn brezhoneg hag e brezhoneg er reizhiad kelenn evit ma vo kelennet ha treuzkaset ar yezh a rumm da rumm. Pourveziñ trawalc'h a zanvez kelennerien da vont war ar postoù kelenn zo ezhomm anezho e tri hentad an deskadurezh divyezhek.

EVIT PIV ?

Degemer

Grataet e vo ar yalc'had d'an holl re :

- o deus tapet un aotreegezh pe ul live kevatal all a ro an tu da lakaat e anv er master «deskadurezh divyezhek»;
- zo o raktres mont war ar vicher kelenner divyezhek galleg-brezhoneg;
- o deus ul live brezhoneg mat; zo enskrivet e master 1 pe master 2 en unan eus ar c'hreizenoù stummañ-mañ :
 - › Roazhon 2 – Kevrenn ar brezhoneg;
 - › ESSM-SBI lec'hiad Sant-Brieg;
 - › KELENN, Kemper;
 - › KSP – Skol-veur gatolik ar C'hornôg e Brest, Gwened pe Gwengamp.



Engouestl an degemerer

En eskemm ouzh ar yalc'had e ouestlit :

- heuliañ betek penn kursus stummadur ar master;
- lakaat hoc'h anv evit ur genstrivadeg Kelennerien er Skolioù (KS) divyezhek pe Kelennerien el Liseoù pe er Skolajoù (KLS) divyezhek, hag un eil gwech m'hoc'h eus c'hwitet ar wech kentañ;
- kelenn e-pad 5 bloaz en ur skol divyezhek galleg-brezhoneg.

Divizoù degemer

Taolit evezh, mar plij, ma vo klok ho teuliad evit ma c'hallo servijoù Rannvro Breizh degemer anezhañ.

PESEURT MODELEZHIOÙ ?

Arc'hantaouiñ

Da 500 euro ar miz e sav ar yalc'had e-pad an 10 mizvezh skol-veur, eleze 5 000 euro en holl evit pep hini eus an daou vloavezh master.

Modelezhioù paeañ

Paet e vo ar yalc'had e 3 gwech evit pep hini eus an daou vloavezh

- ur paeamant kentañ pa vez degemeret an testeni degemer er stummadur hag an emglev engouestlañ sinet gant ar yalc'hour (40 % eus ar yalc'had, eleze 2 000 euro);
- un eil paeamant e-kreiz ar stummadur goude bezañ degemeret an testeni bezañs er stummadur pa vo erruet hanter hent anezhañ (30 % eus ar yalc'had, eleze 1 500 euro);
- un trede paeamant e dibenn pep bloavezh skol-veur (30 % eus ar yalc'had, eleze 1 500 euro). Ar yalc'hour a ranko kinnig d'ar Rannvro testeni heuliañ ar bloavezh klok evit bloavezh ar master 1 ha reizhabegañ e vezañs er genstrivadeg evit ar master 2 evit kaout restad ar yalc'had.

Modelezh kontrollañ

Ma vez torret an emglev e ranko an degemerer daskoriñ ar yalc'had roet dezhañ. Skrivet eo an diferadurioù en emglev engouestlañ an degemerer.

TAPOUT HA FIZIAÑ UN TEULIAD

- Al lizher engouestlañ zo da bellgargañ war lec'hienn Genrouedad Rannvro Breizh www.bretagne.fr
- An termen diwezhañ da fiziañ an teuliad zo ar 25 a viz Mezheven evit an dalc'h 1^{añ} hag an 20 a viz Eost evit an 2^d.

An teuliadoù zo da gas da :
Aotrou Prezidant ar C'huzul-rannvro
283 stradaed ar Jeneral Patton – CS 21101
35 711 ROAZHON cedex 7

PENAOZ ?

Sevel an teuliad

Fiziet e vo an teuliad e Rannvro Breizh – Servij yezhoù Breizh.

An teuliad enskrivañ a c'hoarvezo eus :

- ho CV ;
- ul lizher emginnig ma teskrivit ho raktres micherel ha ma resisait war peseurt doare kelenn divyezhek hoc'h eus c'hoant da vont ;
- ul lizher engouestlañ sinet ;
- un eilenn eus diplom hoc'h aotreegezh pe n'eus forzh peseurt diplom all bachelouriezh +3 pe un testeni eus ar Skol-veur a brou emaoch oc'h heuliañ kursus un Aotreegezh 3^e bloavezh ;
- un testeni a brou hoc'h eus lakaet hoc'h anv e master ;
- un DAB.

DOARE DIBAB AN EMSTRIVERIEN

Dibabet e vo an emstriverien gant ur bodad a vo ennañ dileuridi eus Rannvro Breizh, ar Rektoriezh hag ar c'hreizzennoù stummañ. A-raok e vo selaouet an emstriverien e brezhoneg gant ur bodad rakdibab a brizio youl an emstriverien peurgetket. Pep emstriver a resevo ul lizher-galv a-berzh ar Rannvro.

Daou zalc'h dre gomz a vo, e deroù miz Gouere hag e dibenn miz Eost 2010 e Kuzul-rannvro Breizh. E-kreiz miz Gouere e vo anavezet listenn gentañ peurglok an degemererien hag a-raok deroù ar stummadur evit an eil dalc'h. Degemer a raio an emstriverien dalc'het un emglev engouestlañ da sinañ neuze.

Evit gouzout hiroc'h : Servij Yezhoù Breizh
Postel : bourse-skoazell@region-bretagne.fr
Renerezh Stummerezh a-hed ar Vuhez – servij ambrog an dud.



Skoazell 2010

Bourse
destinée aux
futurs enseignants
bilingues
français-breton



La bourse «Skoazell» est une aide individuelle aux personnes préparant les masters d'enseignement bilingue français-breton. Elle est mise en place dans le cadre des aides individuelles de formation et des actions de la politique linguistique du Conseil régional en faveur du développement de la langue bretonne.

QUELS OBJECTIFS ?

Former un nombre conséquent de personnes qui soient en capacité d'enseigner la langue bretonne et en langue bretonne dans le système scolaire pour en permettre l'enseignement et la transmission.

Assurer un nombre adéquat de candidats aux postes d'enseignement afin de permettre la continuité dans le développement des trois filières d'enseignement bilingue.

POUR QUI ?

Bénéficiaire

La bourse s'adresse à tous ceux qui :

- ont une licence ou toute autre équivalence permettant de s'inscrire en master «enseignement bilingue» ;
 - ont le projet professionnel de devenir enseignant bilingue français-breton ;
 - ont un bon niveau en langue bretonne ;
- sont inscrits en master 1 ou en master 2 dans l'un des centres de formation suivants :
- Rennes 2 – département de Breton ;
 - IUFM-UBO site de Saint Brieuc ;
 - KELENN, Quimper ;
 - CFP-UCO site de Brest, Vannes ou Guingamp.



L'engagement du bénéficiaire

En contrepartie de la bourse, vous vous engagez :

- à suivre la totalité du cursus de la formation master ;
- à vous inscrire et vous présenter au concours Professeur des Écoles (PE) bilingue ou Professeur des Lycées et Collèges (PLC) bilingue, et, en cas d'échec, à vous représenter une seconde fois ;
- à enseigner pendant 5 ans dans une classe bilingue français-breton.

Conditions de recevabilité

Veillez à ce que votre dossier soit complet afin qu'il puisse être traité par les services de la Région Bretagne.

QUELLES MODALITÉS ?

Financement

Le montant de la bourse est de 500 euros par mois pendant les 10 mois de l'année universitaire, soit 5 000 euros pour chacune des deux années de master.

Modalités de versement

- Le paiement de la bourse se fera en 3 versements pour chacune des 2 années;
- un premier versement à la réception de l'attestation d'entrée en formation et de la convention d'engagement signée par le boursier (40 % de la bourse, soit 2 000 euros);
- un second versement à la mi-formation après réception de l'attestation de présence à la formation à mi-parcours (30 % de la bourse, soit 1 500 euros);
- un troisième versement à la fin de chaque année universitaire (30 % de la bourse, soit 1 500 euros). Le boursier devra présenter à la Région une attestation de suivi de l'année complète pour l'année de master 1 et pour le master 2 justifier de la présence au concours pour bénéficier du solde de la bourse.

Modalité de contrôle

En cas de rupture de son engagement, le bénéficiaire devra rembourser la bourse allouée. Ces dispositions sont détaillées dans la convention d'engagement du bénéficiaire.

RETRAIT ET DÉPÔT D'UN DOSSIER

La lettre d'engagement est à télécharger sur le site Internet de la Région Bretagne www.bretagne.fr

Les dates limites de dépôt du dossier sont le 25 juin pour la 1^{re} session et le 20 août pour la 2^{de} session.

Les dossiers sont à adresser à :
Monsieur le Président du Conseil régional
283 avenue du Général Patton – CS 21101
35 711 RENNES cedex 7

COMMENT ?

Constitution du dossier

Le dépôt du dossier se fera à la Région Bretagne – Service langues de Bretagne.

Le dossier de candidature comprendra :

- votre CV;
- une lettre de motivation présentant votre projet professionnel et précisant le type d'enseignement bilingue vers lequel vous vous destinez;
- une lettre d'engagement dûment signée;
- une copie du diplôme de Licence ou autre diplôme bac +3 ou d'une attestation de l'Université certifiant du suivi d'une Licence 3^e année;
- une attestation de votre inscription en master;
- un RIB.

PROCÉDURE DE SÉLECTION DES CANDIDATS

Les candidats seront sélectionnés par un jury composé de représentants de la Région Bretagne, du Rectorat et des centres de formation. Les candidats seront préalablement auditionnés en breton par une commission de sélection, l'entretien évaluera notamment les motivations. Chaque candidat recevra de la Région une convocation.

Deux sessions d'auditions auront lieu, début juillet et fin août 2010 au Conseil Régional de Bretagne. La première liste définitive des boursiers sera connue mi-juillet et avant le début de la formation pour la seconde. Les candidats retenus recevront alors une convention d'engagement à signer.

Pour plus d'informations :
Service Langues de Bretagne
Courriel : bourse-skoazell@region-bretagne.fr
Direction de la Formation Tout au Long de la Vie
– service accompagnement des personnes